

Redadeg 2010
Redek evit ar brezhoneg

Get ma zad, get ma mamm,
E-pad an deiz,
E redimp 'tek an noz
Evit hor yezh,
Kanal a rimp, komz a rimp
A-red an deiz,
C'hwi ivez, dait geneomp 'ta,
"Redit Breizh !"

Get ma breur, get ma c'hoar
Àr hentoù Breizh
E komzan, e kanan, e hunvreat
Brezhoneg eo ma yezh da virviken
C'hwi ivez, dait ganeomp ta,
"Redit Breizh !"

Eh tad-kozh heuliit ac'hanin
Gwiskit ho potoù !
Tamm-ha-tamm, àr ho koar
Eh imp àr-raok!
Ur c'hilometr evit ho yezh hag ho yec'hed
C'hwi ivez' dait geneomp ta,
« Redit Breizh ! »

Get ma eontr ma moereb
Ma c'heniterv
E vo berr an amzer àr hentoù Breizh
'Tal ar mor, e-kreiz kêr, er c'hoadoùier,
C'hwi ivez dait geneomp ta,
« Redit Breizh ! »

A Roazhon da Bondi, a di da di,
Levenez e ma fenn, e ma c'halon,
Tenniñ splet ag an heol hag an endro,
C'hwi ivez dait geneomp ta!
« Redit Breizh ! »

Ma vo kaer peotramant fall an amzer,
Mont a rimp àr un dro, tapit ho roched !
A veg da veg en ho yezh hag en ho ti
C'hwi ivez dait geneomp ta!
« Redit Breizh ! »